

(11)

## An Distro.

Ha ne velit - hu get enmont  
 O qemer an hent glas,  
 Hac eur c'hy meleq o tont  
 Var e lerc'h, ha scuis bras?  
 Eur zoudard eo bras meurbet,  
 Eus ar brezel distro;  
 Pell a zo n'ey deus quelet  
 E vestrez nac e vro.

Mont a rân ta, emezan,  
 Da vriata va douq!  
 E qementse pa sonjan  
 Beva e cavân douq.  
 Perac n'allân get nija  
 Evel ar quennili,  
 Bremâ ven o tiscuiza  
 Tos[ff] dêi va izili.

(12)

Me a gontô dêi founnus  
 Traou dies da gredi,  
 Meus [lre: meur] a dolion burzudus  
 Eus ar brezellidi;  
 Ha penos emeus bepret,  
 Ey eur vont d'ar gombat,  
 Sonjet em muia caret  
 Erit va hardissât.

Ha mousc'hoarzin a rajo,  
 Ha crena a rai,  
 Va firillou pa vouio  
 En dro d'ar c'hastelli;

An adversourien foeltret  
 Ganén o combati,  
 Hac ar re ameus leusget  
 Abalamour dezî.

(13) Hoqueñ, banne na velân  
 Gant ar c'houmoulou dû;  
 Ha pebes trous a glêvân  
 Ur spont eo a bep tu.  
 An ên gant ar gurunou  
 Memes aoun a zistac,  
 ha var he vudurmon  
 Ar bed o trêi, a strac.

Caer ey deveus an tourmant  
 A uz va fenn gourdrouz,  
 Me a query hep nec'hamant,  
 Va c'halon zo didrouz.  
 Caranter, zo ar vrassa  
 Eus va fec'hejou all:  
 hennez eo adle crena,  
 pini zo disleal.

(14) An drous bras ha direol  
 Vel peb tra a dremen;  
 Rac ceta gant ey heol  
 Distro ar sclêrigen.  
 Eur blijadur eo bale,  
 An ear a zo fresq;  
 Me aruo hep dale,  
 Hac ive va c'hy besq.

368

Gant an avel alies  
 He zouch din e clevan  
 Ha monez va mignones,  
 Hac he c'hamejou scan.  
 O velot dreist ar c'hoajou  
 He zy o voquedi,  
 Va c'halon a ra lammou,  
 F zerc'hel n'ellin mui.

Tizout gergent a eure  
 ha d'he gouz a boqas;  
 D'e boanion qeuz n'en devoe,  
 Rac fidel he c'havas. (15)  
 Ha c'houi ive, ra ellot  
 Cavout, qercouly hac en,  
 A bell distro pa vezot,  
 Ha carantez ha fe.

M. Lansalut.

(Vol. IV, p. 14-15.)  
 9 sti. numérotées.

---

 Epigramma.

(15, suite)

Peguen reuzudic oue  
 Er bed - ma goucoude !  
 Nec'hed eo va c'haloun  
 Hac en nos hac en de.  
 En hanv hac er goan,  
 hac haont hac amân,  
 hac amân hac haont,  
 Er bez eo quell bezad.  
 O maro ! direc-ta .....  
 ha tor da c'houg o tout.

M. Lansalut.

(Vol. IV, p. 15.)